

AR GWALENNO A GASTI

HIRIE ENN HON BRO



WAR DON KELVEN



Ma c'halon zo ankeniet, ma spered trubuillet,
Daëro zo em daoulagat, n'on mui evit kousket ;
Ar gwalenno a gasti zo koeet war ma bro,
Dorn Doue a boez war-n-hi, e lec'h skuill he c'hraso.

Ar Franz en em zav bemde enep lezen Doue,
Enep ann Iliz zantel, mammen ar Wirione ;
Dre zotiz e deuz kredet penoz teuje a benn
Da ziverkan en hon zouez ann hano a Gristen.

Emez ann hospitalio Doue a zo laket :
Bremant, evel d'ar pemde, d'ar zul ve labouret.
Devez ann otro Doue, vid mad hon ineo,
Zo breman de ann disurz, devez ar pec'hejo.

Drapoio ar Franz kristen ne d'int ken binniget ;
O pebez tristidigez evid hon zoudardet,
Pere zeu da skuill ho goad evid difenn hon bro,
Nerzet gand ann esperanz da bignat d'ann envo !

Hon listri a ia breman da redek ar mor braz,
Hep kaout bennoz Doue hag hep goulenn he c'hraz !
Hon bugale zo war-n-he, martolodet kristen,
Ha, pa zavo ann arne, piou zeuio d'ho zouten ?

Difennet eo da Zoue ren breman er skolio,
Ar bugelik na glevo memez ken he hano,
Mes, evid hen bouzari, 'klevo ar *Marseillez*.
Evid tado ha mammo pebez tristidigez !

Ne z'euz ket pell e Paris eur c'har a dastume
Imaj ar Werc'hez zantel hag ann Otro Doue,
Pere a oa c'hoaz chomet barz ar skolio kristen.
Pa sonjan e kement-se, ma bleo a zav em fenn !

Ar re dalc'h skolio zantel dre-holl zo argaset,
Evel eur vanden bleizi euz a douez ann denved ;
Ha, mar deuont d'en em glem, e renkont tevel mik,
Pe vo laret e komsont enep ar Republik.

Emez diouz ho c'houencho, menec'h ha trapistet,
Divarc'het ho dorojo, a zo bet harluet ;
Ha n'ho defoa gret netra, nemed pidi Doue,
Rei d'ar paour ann aluzen tro-war-zro er c'hontre.

Ar Franz na qar ken allaz ! enori mab Doue,
Nag ann Iliz hon mamm, nag he belek ive ;
Ha hirie ec'h omp koeet er bazen izela.
Eur vro a zilez Jezuz n'hell ken chom enn he za.

Franz, merc'h hena ann Iliz, pelec'h eman da fe ?
D'az ren ec'h euz dibabet enebourien Doue ;
Rak-se n'on mui estonet ma teu ar gwalenno
Da goean, vel ar grizil, da gastian ma bro.

Ar merer, daoust d'he labour, n'hell pean he Otro,
Memez gant zikour he vroeg hag he vugaligo.
Kaer do deuz holl assamblez c'houezi noz ha beure,
Biken n'hellont arruout, hep kaout skoazel Doue.

Eleiz a varc'hadourien ho doa sonjet ive
Penoz rajent menaj vad, hep goulen gras Doue ;
Mes hirie, hen gwelont sker, ar c'honverz na gerz ken,
Ha na hellont, daoust d'ho foan, diluian ho c'huden.

Ar artizanet ive ho deuz kredet gevier,
Ho fri a zo enn avel o c'hortoz c'hoari gaër ;
Mes ar re zo er plaso a zonz nebeut enn-he,
Ha kaër ho devez gortoz, na gresk tam ho danve.

Ar mado a zo breman tre daouarn bourhijen,
Ha nebeut zo impliet da ober aluzen.
D'ober brezel da Zoue ann arc'hant na vank ket ;
Er c'herio ha war ar mez, nag a ine gwerzet !

Poent eo d'ar pinvik distrei war he c'hiz, hep dale ;
Ha dont da rei skouer vad dre-holl enn he gontre ;
Mar tro ar voul nebeut c'hoaz, me gred en devo chanz,
Ma na goll ket he vado, vel gwechal ann noblanz.

Na gredan ket koulskoude e ve kollet ma bro,
Rouantelez ar Werc'hez, douar ann holl c'hraso.
Ia, Mari, hon mam zantel, zikour ar bec'herien ;
Mar teurveomp he fidi, a doro hon chaden.

Dirak ho kalon, Jezuz, holl hirie daoulinet,
Gant glac'har e c'houlennomp pardon ouz hon fec'het.
Ni a raio pinijen, bete fin hon bue,
Ma chomo e Franz ar fe, gant karante Doue.

PEDEN DA GALON JESUZ

Deut, m'ho ped, kalon Jezuz, da domma ma ine,
Ma c'hellin a denn-askel nijal war zu Doue.
Oh ! netra na garin mui, nemet kalon Jezuz ;
Enn eur veulin ma Doue, e vezin evuruz.

O kalon dous ha tener, sikouret ac'hanon,
Vit ma stagin euz ar groaz ar vue zo enn-on ;
Hag am befe mil vue, e vefent c'hoaz re ver,
Evit gonid ho kraso epad ann holl amzer.

Ma c'halon na garo mui follentezio ar bed ;
Rag wel eo karet Doue, he servijan bepret.
Oh ! dreist pep tra e karin kalon zakr ma Jezuz,
Ha bemde ec'h enorin ma mestr karantezuz.

Adalek hirie, m'hen lar, me veulo hoc'h hano,
Hed ma bue labourin da c'honid ho kraso.
Rak c'houi hepken, ma Doue, a c'hell zikour ma bro ;
Gand eur zell euz ho lagat, ar Franz a adzavo:

ERVOAN HERNOT,

Kizeller e Lannuon, ha marc'hek a enor a urz Zant Gregor.
